

BUEZ EUR BAYANÈS
EN EM GRÆT BELEC

HAC EVIT PUNITION

A ZO BED DEVET E ROM

Var eun ton nevez



TAD ETERNAL, Roue ar gloar,
Kerkouls en en' vel en douar,
Roit sclerigen d'am speret,
Da ziscleria ar malheur c'hoarvezet

Ar c'hossa den zo biscoas bet,
En deveus james en clevet,
Evit kement so passeet,
E vije bet sur Plac'h Belec.

Speret santel, me o suppli,
A c'hui ive Guerc'hes Vari,
Da rei dimé hoc'h assitanz,
Eviñ gallout en em avanz.

Pehini zo bet pevar bloas anter
O vinistra Corf hor Zalver
Eun dra a na verit ket
Nac'hi na fumellen a bet.

Da rei sclerigen d'am speret,
Da drei ar gallec en brezon nec,
Da ziscleria da gristenyen,
Ar vræc a Juquetan, certain

Breman christenien e commançan
Discleria deoc'h ar vuez-man :
Homan o oa ganet en payanes,
Er mes demeure ar gristenes.

En iaouankis abandonnet,
Gent tad a mamm dilezet,
Vit commanz e buez prestig,
En em viskas 'vel eun Ermit.

'Vel eun Ermit en em viskaz,
Evit commanz e boët da glask,
Poursuiv e hent gant dilijanç,
Ec'h erruas souden en Franç.

Erruout a eure hep retardi,
E kichen ty markis Tollery,
Ar varkisez 'vel m'en goetas,
D'e vlac'h a gambr et lavaras :

— Buen ma c'helfet emeti,
Roët d'an ermit antren en ty,
An Ermit en ty antreet,
Ar varkisez neus saludad.

Pardon en devez goulennet,
Demeus e oll offansou gret ;
D'ar varkisez, a wir galon
Lar a oa payen a nailon.

Ar varkisez 'vel m'en clevas,
Outan souden a c'houlennas ;
— A c'hui a ve contant emezi
Chom eun nebeut ebars em zy.

Mo c'houlen pardon, emezan,
Euz ma offansou bras kentan,
Hac a chomo en o reket,
Moyennant vezin badezet.

Er memez amzer ar varkisez,
An autrou markis assembles
Gant solennite certenamant,
A eure a vadeyant.

Beza int bet, wir galon,
Ar maëronnez hac ar paëron
Souden e zeo bet kasset
Da studia a gret beleg.

Goude ma eo bet belleguet,
En pad pevar bloas eo chomet,
Ebars en ty en o servich,
Oferenan bemde en o illis.

Ar pevar bloas passeet,
Laras d'ar markis eun devez,
— Ma pe ar madelez, emezan,
Conje ouzoc'h a c'houlennan. —

Ar markis hac ar varkisez,
Carguet eals a dristiguez,
E c'honje dezhan o d'euz roet,
O c'houlen outan ar sujet.

Ma filior dime e leverfet
Petra signifi ar sujet.
Ma deuit da guitad on ty,
Er fesson-mag don abandouni ?

Abaque ma meus bet ar sclerijen
Hac an ano a vir gristen,
E meus gret ar bromesse,
Da vont da visita eur be.

Ini ma Zalver biniguet,
Dre e graç war am permetet.
Hones eo an occasion,
Ma o kuitaan-me ma faëron.

O vezan klêvet ar reson,
Gant joaustel en o c'halon,
En em gueljont o daou contant
O rei dime tregont rez arc'hant.

Commans a rin-me ma beac'h,
Er fesson a pelerinach,
Ma zoun bet en em rented
En ty an Itron Varia Loret.

Antreet ebars an Illis,
A celebret ar sacrifics,
O sortia! goude timat
E zourn erruet ebars en Napl.

Hep arreti on nep andret.
Kichen ar montagn soun arruet,
O vezan surprenet gant an nos,
Hep gousont pelle mont da repos

E zoun arruet gant grac Done,
E kichen ty an autrou Cure,
En neus sur mad va recevet,
O sonjal e voan eur helec.

An deis varlec'h vintin a savis,
Evit celebri ar sacrifics,
Goude fin ar venediction,
E ris ive instruction,

Dre pehini e rentis contant,
An oll kement a voa present.
A eur voues tout e c'hejont,
A d'ar c'hure e levarjont.

Va fedi ma pliche gane,
Da chom en'ho neuze gante.
Ar c'hure contant couls hag int,
Zeus neuze da c'houl ouzin :

Contant a vec'h, bellec yaouanq,
Dam servicha fidelamant, —
He c'houlen dean meus accordet
C'huech mis e meus an servichet

'Vel voa va musur remplisset,
Er fin c'huec'h mis meus avouet,
E meus lavaret d'ar c'hure
— Voan fumellen e guirione —

Ar c'hure evel m'an glevas,
Estonet bras en em gavas
O veza incredul anezan,
C'heure d'oc'h-tu ma bizitan.

Ober ma c'habillan en fumellen,
O lavaret dime e velen :
— Sortiet emean, euz va prezanz
Rag da Zoue eo bras an oflanz.

An oflanz o c'heuz cometed,
Dre o faos sacrificsou great.
Kent vit monet em zro
E c'houlennis ma papero.

Ar c'hure din en deveus lavaret
— Evit ho papero na pezo ket,
Dre promptitud a dre valis,
Tri dol contel dezan rois.

Souden neuze 'voant kemeret,
A d'ar prison 'voan conduet,
Evit souffr ar bunion,
Ebars ar guer a Rom.

Ma froses a voa greet buan,
Da veza losket gant an tan,
En punition d'am pec'het,
A d'ar muntr infam am boa greet.

A raoc mervel e c'houlennan,
Pardon ouz Doue da genta.
Memez amzer sou ar Verchez,
Ouz an oll Zænt hag an AËles.

Demeus ma oll sacrilejou
 'Meus cometet ém sacrificiou
 A goulen er memes instant,
 Ous kement den a so present.

Da gavet sonj eus ac'hanon
 Ebars en oll pedennou,
 Da hedi Jesus hag ar Verc'hes,
 Da gavet eus ma ine truez.

Choas e c'houlennandigant Doue
 Da guement glevo len ma bue,
 Ma vezin inspiret noeze,
 Evit delivranz d'am ene.

Da laret eun *De profundis*,
 Peden ordinal en Ilis,
 Evit delivranç a memor,
 A inco ar Purgator.

Peb a *Bater* hag a *Ave*
 A *Requiescat in pace*
 In manus tuas *Domine*.
 Doue da veza gant ma ine.

AMEN.

Propriété de l'Editeur.





CHANSON AN AMOUROUSTET

Chilaouet, ma mignonet,
Chanson an amourouset
A so gant eur c'hernevad 'vit an deio composet,

Amourouset so eur guer
Hac a so dous ha tener
Caus he da vil nec'hamant hag ive da vil miser.

Pa vo an nos pe an de
Daou zen yaouanc a gosto
Quent ma c'houfeong doare he d'harivo gant

Ar pot a gause bra
Hac ar plac'h a neus joa,
Evit bezan evurus na fot nemert eun dra
Amourouset a ra dhe
Dimezi hep dale.

Pa vouing neve eureuget,
Vad a ra dhe nem velet
Casi ne ra mert unan an ozac'h hag ar vreg.

Quen bras e ar garante
Ha quen bras an amitie
Neus an eil vit eguile hag en nos hag eu de,
He ra deze lavaret
Pelzo eleyemp beza dimeet.

Tudo yaouanc, me ho ped,
Memestra divoallet
Liassoc'h so dimezet vit a so a eset.

Goelet a meump a vejou
Cals a chanchamanchou.
Er menajou e caver hep sort ambarassou,
Pa zeu en tieguesou
Cals deus a bouponou.



Unan a c'houlou crampoos
Hac eun al gallettes
Eun al so en he gavel ho clasq donet er mes.

Ar vreg so dre an ti
Vel pa ve etourdi
Na neus den evit clevet raison vad ebet ganti,
Fachet hen deus he fried,
Adieu d'an amourouset.

TuJ yaouane, mar em c'bredet,
Lacañt eves, diouallet
C'houi he an evurusan tud a so voar ar bed.

C'houi so tre ar pardonniou
Ha dre an assambleou
O dansal, o c'hebattal, o c'hefan faquennou.
Eun den yaouane, mar gue fur,
So parfet he blijadur.

Hac ar re so dimezet
An darn vuyan meus goelet
A vanque eun dra benag dalc'hrad do evuruset.

Darn so nac a laer ar yalc'h,
Ha darn al e ya voar vare'h,
Real a gar ar chopin, queu a vont mev coalc'h.
Tud yaouane, mar dimezet,
Choaset tud fur ha parfet.


PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan
Souhaiti ferm a ran
Yec'het dan daou zen neve, chans ha prosperite.

Men ho ped, camaradet,
Vit eur farç ne fachet quet ;
Permettet a badinal er tre ar vignonet.

Graç dimp da nem gavel c'hoas
Joas evel biscoas
Ben an de-ma pen eur bla, ebars ar momes plaç,
Ho strinquan gant hon goeren
Da yec'het ar poupon,

LENEINDRE.



CHANSON

AR SOUBEN LES-GUIN-ARDANT

En eur gommaç canan, exéus a c'houlenan
Digant quement hini a sa présent aman.
Abeurs eun oc'h yaouank, di a oa ordrenet
Rei dezan souben les, nos quenta he euret.

Mes en lec'h souben les, me rei d'ac'h da danvad,
Malaga ha Champagn, liqueurio dilicad
Biscoas no oa evel sort gante bars ar vro,
Me meus gret ho digaç express deux a Vordeaux.

Na neus prinç, na baron, roue, nag empereur
A guement ma nefe tanveet ma liqueur,
Pa zon deuet express evit ho regali,
An tanva quenta a zo d'ho pried a c'honi,

An eil tanva a zo d'an daou zen a henor
A neus ho conduct eus tol hon Redemptor
An dredre tanva nei so do mam ha do tad,
Pere a neus glac har ho fonned do couitad ;
Dar berved a pedan breudeur a c'hoarezet,
Quement hini ho car, querenet ha mignonnet,

AR PES SO AMAN VOAR LERC'H A VE PROPR DA GANAN EUS
TOL DA EUN EURED

An debes a hiro, pebes contantamant,
Goelet an diou famill, ha quement so présent,
Aman nem assemblet, gant cals a garante,
Diredet ol gant joa d'henori an du neve.

Na gredan quet a ve den er gompagnonnes
A guement a nefc nep sort trisidigues,
Couscoude meus clevet alies lavaret :
Er bed man na neusquet a vouir evurustet.

Bezan e glac'harus 'vit eur vam hag eun tad
Pa oelont ho bugale ho tonnad do c'houtad ;
Maguet ho deus hin bet, gant teneridigues,
Ha reit d'he ho c'honje dout en priedeles.

Breman daou zen yaouanc, c'houi a vo obliget
Da zont d'ho c'honsoli queit ha youint voar ar bed.
C'houi a heus bet ive glac'har ha calonnad
O tond da guimeyadi eus ho mam hac o tad.

Ho kalon zo bet treuzet gant ar glac'har
O laret quenavo ha do breur ha do c'hoar
Bemde oac'h assembles 'neun union barfet ;
Hag en nos hag en de, c'houi so en em garet.

Gant ho bolonte vad e zoc'h nem separet.
Ha cetu c'houi breman unisset d'eur pried,
Quenavo tad a mam, breudeur ha c'hoarezet,
Men he ya da zalc'hen menag gant ma fried.

Ar briedeles he kæra tra zo er bed,
Gant Doue he c'hunan he bet etablisset,
Pe oa crouet Adam, gant krouer ar bed-man,
E neus roet Eva evit pried dezan.

Rag se, daou zen yaouanc, quemeret confianç
Ha Doue a rei d'ach prosperite ha chang
Ha nem garet bepret gant gouir fidelite,
Savet ho pugale en karante Doue,
Ha pa zei ar maro do separi ho taou,
Graç d'ac'h da nem gavet assembles en envou.

LENEINDRE.

(Propriété de l'Editeur)